

Erit ho turgarehat eus ar pemp bloa var'n ugent labouri ho pems roet
d'ar skol gristen ni ginnig d'oc'h ar zon-man a greiz-kalon.

Pe- tra'-ra-fe d'oc'h pli- ja- dur, O mi- gno- nez deiz hoc'h en- red? Kle
ret o ka- na mer-ched fur A oar ka- na vel la- bou- sed? Ni
ga- no d'oc'h, o mi- gno- nez, A greiz ka- lon, eur ga- naou- en; Ni
ga- no son ho ka- ran- tez, Son du- di- us, dous ha laouen.

1. Karet a rit ho Plonevez
Ker ho tud koz, ker ho kavel;
Enni karit ho levenez
Bemdez, bennoez betek mervel...
Ar c'heriou all eus an douar
'Tit ho kalon a ve c'houero,
Ne rofent d'oc'h nemet glac'har,
Gruhuilh, anken, klenved ar vro.

2. Karet a rit ar c'hlerjer drant
A c'halv an dud da di Doue,
Karet a rit hoc'h iliz koant
Ken madelezens d'oc'h ene...
Klevit ato mouez ho klerjer
Ouz ho kervel da di Jezuz,
Bezit dalc'hmad harz an der
Hag e vefot bepred euzuz.

3. Karet a rit var an uhel,
Penngoz kizellet ar "Faen",
Karet a rit ho "Meilh-avel"
Guintet ken sour var an duichen...
Chomit betek, pred ho maro
Disfont e penn ar skol gristen
Ha Ploneveziz ho karo
Divar vrenan da virviken.

4. Karet a rit goulen skoazel
Ouz ho mamm goz santel Anna,
Karet a rit, en he chapel
Mont da bedi pe da gana...
Pedit, karit, mintin ha nor,
Seder ha drant hed ho pubiz
Hag e kampfot er baradoz
Gant an oll zent hag ar cler.

5. Karet a rit evel ho mamm
Al leanez a ren ar skol,
Ho kalon ho leun a dan-flamm
Hag a resped rit ar "Seur Pol"...
Chomit bepred nerrz he c'hosni,
Bezit levenez ho mamm goz
Ha var ho penn ha var ho ti
An nerr a skuilh mil bennoez.

6. Karet a rit ar rugale
Mat er beden hag el labour,
Ober a rit d'ezo bale
Gant eur gouz dous eus ho mouez flour...
Guellet e vo eur gurunen
Blansonet d'oc'h gant ho merc'hed
Hag a skedo en dro d'ho penn,
Eur deiz, e palez an Dreinded.

7. Karet a rit ar merc'hed fur
A zo rugale da Vari,
Ar he a glask o flijadur
En eur zont aman da c'hoari...
Setu perak, o c'hoar hena,
Gant oll garterez hon ene
Ni 'zo deit herit da gana:
D'oc'h, da viken, bennoez Doue.